

(234, suite)

Relation truezus

Var sujet preizerey, muntr cabiten ar vatimant hanvet
an Alexandr, eus a Voundel; muntr al letanant; muntr ar
Mestr-Eqipach, hac eus a bêvar martolod; laeronciou,
pillach ha fesserey paperiou ar vatimant, êruet en Indes-
Sao-Eol, ar 27 demeus a vis Du 1837.

Var ton ar Plac'h libertin.

(235)

Me ho ped a galon, Speret a sclerijen,
Da deurevezout hirio cundui va fluen,
Evit ma ellin donet d'am brois da ziscleria
Grimou euzus meurbet, a rêi d'an oll crema.

Mar deo douç rêi d'anaout an actionou mad,
O comz eus a grimou e zeus goal galonad.
Caromp atao ar vertuz, bezomp oll guir gristenien,
Ha detestomp ar c'hrim hac an oll vuntreien.

C'houi, martoloded paour, custum ouz an danger,
Obliget da stourma enep ar goal amzer,
Diouc'h ar tempest, ar rec'hier ha diouc'h ar môr furvus,
Entoues an oll fourgas, bepret qer dangerus.

Gant eur gourach ardant, en amzer ar brezel,
C'houi gombat vaillamant hon enemiet marvel;
Er pontonniou horrerus couz evel er prisonniou
E vouec'h, vit ho prô, souffr pep seurt tourmantchou.

Mes breman neo qet se, a drugare Doue,
A ranqit da zioval, vit conserv ho pue:
Diouz ar vuntreien e zeo, pere ne z'oujec'h bigen
A vije n'em rentet dec'h-u da vourreien.

Sellaouit, Bretonet, dreist oll, c'houi, tud a vôr,
Recita torfejou eus ar brassa horror,
Coumettet dre an arrach demeus an ambition,

234

Ha dre an ancounac'h eus ar Religion.

Daou vloaz tremenet so e parti a Vourdel
Eur vatimant carguet a draou a bris huel,
Evit gaer Batavia, en Indes eus a zar-eol,
Dre amzer gaer ha joa eus an ekipach oll.

(236)

An ekipach-se voa demeus a zeitec den:
An autrou Louis Bouët, voa genta cabiten;
Renead Marsaud, second. Eun drangilite barfet
A rène en o zouez, hep nepr sonj en torfet.

Goude bea gñerzet an oll vare'hadourez,
E carg ar vatimant hep dale a nevez,
Demeus a draou precius a dallie daou c'hant mil scoët,
E partijont qerqent, hac int contant meurbet.

An dalvoudequeuz vras demeus ar garguêzon
A laga en Marsaud eur goal ambition;
An diaoul ouz en tenti, a laga en e speret
En em ampar a dout, neus forô dre bez torfet.

Formi ra eur c'homploù hac en em lag' er penn,
Hac e choas consortet evit dont d'en difen.
Qerqent en em glemjont-ta, hac ebars en eun instant
En em rentjont mestrou demeus ar vatimant.

Avrêt, den miserabl! ha sonj eus ~~den~~ Doue
Pini a bunisso da oll grimou eun de...
Mes Marsaud oll furoret hac en eun arrach euzus,
En em decid d'ar c'hrim, allas! ar maleivrus!

(237)

Ar paour qez cabiten, a zervich var ar pont,
Gant an drous a glêvas a voe carguet a spout;
Marsaud a zaillas varnan gant darn eus e consortet,
Evel tud furius, hac er môr voe sthappet.

Ar spouron, ar revolt a zo en eun instant
Entre 'r vartolloed ebars er vatimant:
Pelec'h ma hor c'habiten? a grie darn a ur vouez;
Rentit demp anean: hor mignon eo ennes.

Inutil ez eo comz eno deus ar bouvreo ;
 Nep rēson vad ebet en nep fēçon na gles ;
 Vel eul leon arvajet, Marsaud, hep mizericord,
 A stlap [al] Letanant gant furor dreist ar bord.

O clasq dont da essât savetat e vue,
 En em dalc'h ouz qerden ar vatimant neuze ;
 Mes ar furius Marsaud a rās deñ discregui,
 Hac en tolas ive er mōr evit beuzi.

(238) Neuze e gonsortet a zaiillas var eun all,
 Pini lage eves ouz o desseinou fall ;
 Mes, evel an daou quenta, en despit de oll gourach,
 Eo stringet bars ar mōr ... Doue, pebes arriach !

Ar Mestr Herve, êru, armet eus e gontel,
 Evit clasq derc'hel penn demeus an dud rebel,
 A zo qergent assommet a doliou cros pistolen,
 Ha tolet bars er mōr gant an dud inhuman.

Ar potr yaouanc Dossset a zo neuze galvet
 Vit servich da bastur er mōr d'ar persget.
 « Pardon ! pardon, emeñ ; oh ! roit din an amzer
 » Vit ma scriffin d'an zhad va divea lizer ... »

— « Nan, nan, eme Marsaud ; inutil e zo ze :
 » Te yel gant ar re all da fonç ar mor ive. »
 Ar buquel paour zo stlappet neuze e bars er mor dōñ,
 O c'houlen ouz Doue e venediction.

Eun all en deveus bet ivez ar memes fin,
 Dre urz an den barbar hac infam assassin.
 Ceta-ta c'hoec'h den beuzet dre urzou an den hagar ;
 Fremi a ra dre oll ar mōr hac an douar.

(239) Ne oun penos neo deut an tññ demeus an ã
 Da bulluc'hi eno autor ar c'hrimou-ze !
 O justiq ouz un Doue ! penos oc'h eus permittet
 Da guement a grimou bea accomplisset !...

Stouomp dirac justiq ar Vajeste divin :

236

Abred pe divead ar c'hrim en devo fin.
 Ma neo qet ar c'kriminal soët gant justiq ar bed,
 Ar Barner souveren assur n'er manco qet.

Marsaud ! barbar Marsaud ! poursu, poursu da rout...
 Bâr eo da oll grimou ! dorn Doue zo varnout...
 Na elles mui achappi ouz rebech da gonsciang ;
 A fouç ar môr e sav ar c'kri : Venjang ! venjang !...

O Doue, va C'hrouer ! penos ellout compren
 En deus ellet Marsaud dont da veuzi seiz den !
 Ret e vije counnaret dre valiç an drouc - speret,
 Vit dont da goumetti qenlies a dorfet.

Sonjal a ras qerqent, en e gonsclusion,
 Donet da bartaji neuze ar garguëzon ;
 Mes an disput o devoe, o rentas adversourien :
 N'eljont en em entent en nep feçon a gremm.

Èruet en Newport d'an devez eus ar zul,
 E rancjont mont da gaout an Clutrou vig-consul,
 Pehini, dre e fumes hac e vras attantion,
 En em douetas ractal demeus an drachison.

(240)

Consortet ar muntrer, p'o deveus se gouezet,
 A zo prest ha blan cazi oll achappet ;
 Mes goude certen amzer, Raymond, unan aneze,
 Zo digasset da Vrest, ha barnet goude-ze.

Arêtet voe Marsaud, digasset neuze prest
 Erit bea barnet ebars tribunal Brest,
 Bars er memes batimant e voa calz eus a destou,
 A ras anaveout eno e oll grimou.

An testou zo clêvet, hac o deus deposet
 Sclêr mat d'ar barnerien qement voa èruet :
 Marsaud, meurbet iffrentet ha carguet eus a vombang,
 A voa terrubl hardi ha leun a arrogang.

Inutil e zo dit fossi da baperou ;
 Var da faç e veler gravet da oll grimou :

Unan c'hoas a vange did ; beuzi res da wir vignon,
Ar torfetour Goding, ar joa en da galon.

(241) Herves an testeni, Raymond zo bet caver
Nebetoc'h criminal, hac e zeo condaonet
Da dremen e oll vus destumet en eur prison,
Da laqat ar remorse d'antren en e galon.

Ar c'hoerpec a vis meurs eo Marsaud condaonet
Gant tribunal a Vest da vea dibennet
Var blacen vras ar C'hastel, da rei squer da bepini
Var moment divea ar c'riminal impi.

Gergent m'en deus gouezet e voa bet condaonet,
Ar remorse en e greiz a zo bet antreet.
O clasq hasten e vuez en deveus bet rappellet;
Mes ar setañ zo bet en antier gendalc'het.

Letu eta an den leun a ambition,
Goude e oll grimou, tresantet e galon!
Oh! Marsaud, muntreer infam, evit da grimou euzus,
Te a ranco eta souffi eur maro mezus!

D'an deg eus a vis mae, abardaes o veza,
Voc lennet e arriet en e brison dezã.
Gergent en em interroch, hac e sant en e galon
Ar c'hoant da gaout sicour eus ar religion.

(242) Laqat a ras pedi an Lutrou Graveran,
Person a Sant-Louis, dont da gavout anean.
Ar person vertuzus-mañ gant hast zo en em rentet
Da gonsoli Marsaud, a voa dija simplet.

Goude m'en deveus bet ar gonsolation
Da receo ar zicour eus ar Religion,
Ar person a ro deñ ar grucifi da boqat;
Gergent Marsaud a zant e gowrach o creñvât.

En eur boqat d'ar groas, Marsaud ar maleürus
A griez gant glac'har : « Pardon! pardon, Jesus!
» Me zo eur muntreer infam; m'ho ped, deut d'am pardonni

238

» En faveur ar maro e z'an da anduri .»

Rentet en traon 'r chaffod, e progas c'hoas d'ar groas,
Ha demeus ar person neuze e tistroas,
Evit e drugarecat demeus an oll vadelezh
En devoa deurvezet caout vit eur pec'her qez.

Pa bign var ar chaffod eo meurbet estonet
O velet eun nombr bras a dud eno rentet.
Ractal n'em ro d'ar bourres; emedi en e boustoar;
E benn zo diruillet qerqent var an douar.

Justiq an dud a zo eta =ccomplisset;
Ar victimou er mor a zo breman venjet.
Er quis-se ec'h echuo atao an oll vuntreien:
Abret pe diveat ec'h êru o zermen.

(243)

Eur bobl immanz a voa var blacen ar c'hastel
Evit gizelet Marsaud o tonet da vervel.
Goaset, graquez, bugale, voa en em gavet eno:
Febes arvest horrubl voa qementte dezgo!

C'houi, tadou ho mamou pere n'eus bugale,
Elevit aneze ebars doujanz Doue:
Grit ma carint ar vertus, ma cassaint ar c'hrimou,
Hac e vezint eurus ar rest eus o c'eiziou.

Goulenomp ouz Doue d'hor quenderc'hel bepret
En ho religion, exant a bep pec'het,
Evit ma teuimp eun deiz, goude hor poan da repos
Gant an oll re eurus en gloar ar barados.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 234-243.)
strophes non numérotées.